

**MOUEZH**  
**SANT ERWAN**

**1968**

embannet gant **SKOL**

Niverenn : **6**

MOUEZH SANT ERWAN  
oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

KANNADIG BREURIEZH SANT ERWAN,  
embannet gant SKOL, dastumadenn renet  
Armañs Ar C'halvez.

Koumanant da 4 niverenn Mouezh Sant Erwan : 15 lur;  
Koumanant da 4 niverenn SKOL, gant M.S.E. : 15 lur;  
Hanterbriz evit ar studierien hag ar soudarded.

Priz an niverenn-mañ : 3 lur.

K.R.P. Revue SKOL, Crec'h-Avel, LANNUON; Roazhon, 1911 06.

T A O L E N N .

Skol ha Mouezh Sant Erwan e 1968 ha 1969	p. 3
Buhez ar Vreuriezh e 1968 ha 1969	p. 5
Kampoù 1968 ha 1969	p. 7
Kamp B.S.E.er Vouster, 1968	p. 9
Nevezintioù	p.10

K U Z U L A R V R E U R I E Z H

Rener : Y.E.Ar C'horr, bourg de PLEUDANIEL, 22  
Eil-rener: Y.Talbot, 12 rue Cie Roger-Barbé, LANNUON, 22  
Sekretourez: Rivanon Kervella, Kroaz-Hent Perroz,  
Park-ar-Poull-du, LANNUON, 22  
Teñzorer: F.Ar Moal, Kroaz-Ar-Forn, FLOUAGAT, 22  
C.C.P.Pariz, 16 679 47  
Aluzener: Armañs Ar C'halvez, Crec'h-Avel, LANNUON, 22

=====  
S K O L, niv. 40  
=====

=====  
MOUEZH SANT ERWAN, niv. 6  
=====

"UN CAS DE BILINGUISME:

## LE PAYS DE GALLES

HISTOIRE, LITTÉRATURE, ENSEIGNEMENT

gant Armañs AR C'HALVEZ,  
rakskrid gant ar C'helenner L.FLEURIOT,

a vo embannet gant SKOL e miz c'hwevrer 1970.

- 1<sup>o</sup> An niverenn gentañ a vo anezhi ul levr gwirion a 200 p, a vent vat, moulet e Kastell-Aodren. Talvezout a ray evit peder niverenn (41,42,43 ha 44), ha ne vo kaset, evel-just, nemet d'ar re c devo paeet o adkoumanant e koulz.
- 2<sup>o</sup> Lod eus ar goumananterien o deus kaset dija gwerzh ur rakprenadenn, 14 lur. Lakaet e vo an arc'hant war o c'hont ha ne gollint netra.
- 3<sup>o</sup> An niverenn-mañ a zo bet aozet buan-ha-buan evit abegoù mererezhel; setu perak ez eo ken tanav ha diskeudenn. An embannadur kentañ diwar-benn Bro-Gembre a vo un tamm digoll evit ar goumananterien.
- 4<sup>o</sup> Ar c'hentañ ma vo gallet e vo embannet un niverenn all eus "Mouezh Sant Erwan" gant lizhiri ha notennoù a bep seurt ha skeudennoù tennet er c'hampoù.

oooooooooooo

### PRIZ AL LEVR DIWAR-BENN KEMBRE :

- evit ar rakprenerien : 14 lur, franko;
- evit koumananterien SKOL: gwerzh 4 niverenn (ur c'houmanant);
- evit ar brenerien voutin : 18 lur.

### PRIZ NEVEZ AR C'HOUMANANT DA SKOL :

15 lur hiviziken.

oooooooooooo

### WANIG HA WENIG :

- un niverenn zoubl (kerzu 1969) a zo war ar stern;
- priz ar c'houmanant evit 1970 : 6 lur.

C.C.P. W & W : Journal W & W, RENNES 1705 96

- 2 -

SKOL ha M.S.E. e 1968 ha 1969.

P'en em gavo an niverenn-mañ gant al lennerien e vo tost da zaoz vloaz abaoe m'eo bet embannet an hini ziwezhañ, miz genver 1968 (SKOL, niv.39 pe M.S.E.niv.5).

Ur wech c'hoazh ez eo ret din displegañ peseurt diforc'h ha peseurt liammoù a zo etre SKOL ha M.S.E. Mouezh Sant Erwan a zo kannadig Breuriezh Sant Erwan, embannet dindan anv Skol. Setu perak e vez moulet war ar c'hannadig daou niveradur: hini ar gelaouenn Skol ha ouzhpenn unan ispisial dezhañ e-unan, evit plijout d'ar re ne zegemeront nemetañ.

Klask a reomp lakaat an izili yaouank da skrivañ lod eus ar pennadoù. Ne zœuomp ket a-benn d'hen ober kement ha ma karfemp. O studioù ne lezont ket - hervez kont - kalz a amzer vak ganto hag ouzhpenn ne blij ket dezho skrivañ; gwelloc'h eo ganto an ober, pezh a zo un dra vat, moarvat, met ret eo ivez reiñ da c'houzout peseurt labouroù a vez bet sevenet ganto.

War-lerc'h embannidigezh Ar Pevar Mab Emon ez eus bet skrivet war gannadig Ker-Vreiz e teue Skol er-maez diresis a-walc'h, hag e tifluke gwech an amzer gant un niverenn dev ! Gwir a-walc'h eo bet an evezhiadenn-se e-doug ar bloavezhioù tremenet, ha gwir e c'hellfe bezañ c'hoazh en amzer-da-zont.

Emañ bremañ dindan ar wask ul levr diwar-benn Bro-Gembre hag a vo ennañ etre 200 ha 210 pajenn moulet war follennoù bras.

Tamallet e vo - tamallet eo bet dija - d'al levr-se bezañ skrivet e galleg, ha n'eo ket hep abeg peogwir Skol a zo, sañset, un dastumadenn vrezhonek. Evit abegoù abouez ivez eo bet embannet e galleg. Da gentañ, bez' ez eus anezhañ an dezern em boa difennet ar sadorn 14 a viz mezheven 1969 dirak skol-veur Roazhon ha rediet e oan bet gant ar reoliadur da-aozañ va labour e galleg, daoust m'hor boa klasket, an Ao.Fleuriot ha me, ober gant ar brezhonek (1).

D'an eil, ul levr bruderezh eo evit hor yezh ha yezhoù gwasket all Europa. Ret e oa eta e embann e galleg evit ma vefe lennet gant ar muiañ posubl a dud. Ar vrezhonegerien a zisplij dezho a-grenn ar galleg a c'hello lenn pe adlenn ar studiadennoù a zo bet embannet gant Skol diwar-benn ar gudenn: Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre (Niv.1, rummad kozh), ha dreist-holl Ar C'hembraeg hag ar Skol (Niv.10, rummad nevez). (2)

- 3 -

Petra a vo embannet en amzer-da-zont ? A bep seurt moarvat, Karout a rafen da gentañ sevel ur studiadenn diwar-benn emzalc'h an Iliz e-keñver Breizh ha da c'houde adembann dibaboù pennadoù eus hor gwellañ skrivagnerien a-raok ar brezel bras kentañ. Evit bremañ e soñjan e Lz Le Clerc kozh, a sine Kloareg ar Wern, e Fañch an Uhel, hag e Paotr Juluen, anv-pluenn Juluan Sklison; a-drugarez d'e vreur, an Ao.Sklison eus Plistin ha d'an Ao.Klerg, emañ e holl sarmonioù, brezhonek etre va daouarn.

Rouez eo deut da vezañ bremañ ar skrivagnerien disi ha buhezek. N'eus nemet un diskoulm : distreiñ d'an andon, pleustriñ ar re a **verve** enno ken tomm ijin ar yezh, e-giz m'o deus graet Kembreiz abaoe dibenn an 19-et kantved (3).

#### Armañs Ar C'halvez.

1) anv resis an dezenn: "Recherches sur l'Enseignement de la langue galloise, dans son contexte historique, culturel, social et politique".

Anvioù ar varnerien: Ar C'helenner GAGNEPAIN, kadoriad; ar C'helenner FLEURIOT, daneveller; an Itron CHAMPOLLION; o-zri eus Skol-veur Roazhon.

2) E gwerzh e ti Skol evit 3 lur ha 5 lur.

3) Lenn al levrioù kozh a skoazell ouzhpenn da anavezout ha da gompren an amzer-dremenet:

"Mes, pa 'c'h omp bugale d'ar Frañs, e fell dimp kent kuitaat Londrez, mont d'ober un dro betek an Ekspoizision Gall ha Saoz, a zo digor abaoe miz mezheven hag a chomo digor betek fin miz here... Goude hor pred, e klevomp ur muzik tost dimp o seniñ ar "Marseillaise", kan broadus hor bro ger. Lammat a ra hor c'halon en hor c'hreiz gant al levenez a santomp, ha ni diouzhtu da gaout al lochig koant e-lec'h emañ ar vuzikerien o c'hoari...N'eus forzh pelec'h ez omp, e kavomp un didu dreist muzul o klevout un ton hag a zegas dimp soñj eus hor bro. Ha mar geo seder hon tal, ec'h eo sonn ivez hor penn: **lorc'h** az o ennomp o klevout muzikan (sic) ken c'hwek ha ken reizh. Kenvroiz dimp eo a zo o c'hoari, muzikerien ar c'hentañ "Génie" eus Versailles, muzikerien hag a gavfed nebeut en Frañs gouest d'o fakañ... Bepred eo e c'hellomp lavarout, goude bezañ klevet an daou-rumm o c'hoari ar "Marseillaise" hag ar "God save the King" e plije dimp kalz muioù-h doare c'hoari hon c'henvroiz; dous ha fetis evel voulouz. Ha bezañ e oa ennañ un dra, evit ar "Marseillaise" da vihanañ, ha na oa ket ar Saozon evit kavout: un ene tomm hag a domme hon hini."

L.Le Clerc, MA BEAJ LONDREZ, 1910, p.p.188-193, passim.

#### BUHEZ AR VREURIEZH E 1968 ha 1969 .

Mar deo chomet M.S.E. ho gos mut e-pad an daou vloaz tremenet, B.S.E., hi he deus labouret kalz. Setu amañ un daolenn eus hec'h oberiantizoù.

#### OFERENN VREZHONEK VOUSTERU.

An 21 a viz ebril 1968, e oa bet lidet un oferenn vrezhonek en iliz-parrez gant skoazell izili ar Vreuriezh hag un nebeut studierien yaouank eus Kintin ha St-Brieg. An Ao.Bourdellez a gencferennas gant an Ao.Kerrain, hag a brezeas. Merennañ a rejomp holl e Kernevez, e ti mamm Fañch Ar Moal, hon teñzorer. Goude ar banvez - un degemer roueel a oa bet graet dimp - ez ejomp da weladernañ chapel Sant Fiakr, e Gurumhel, a zo ivez e karg person Mousteru. Batet e oamp bet gant kaerder ha braster ar chapel ha fromet gant he stad fall. War an taol hor boa divizet derec'hel eno hor c'hamp Pask e 1969 evit ober un tamm adkempenn d'an dismantrou ha dihunif tud ar vro war-un-dro. Tennet e voe skeudennoù eus an diabarzh hag an diavaez, en o zouez unan eus an daolenn-aoter e mein a dlee bezañ laeret e-pad an hañv.

#### BODADeg-VEUR AR VREURIEZH E 1968.

Divizet e oa bet ne vije graet kamp ebet e-kerz an hañv en abeg da Gendalc'h Etrekeltiek Foujera. Ar Vodadeg-veur a voe dalc'het e Bullien ar sul 18 a viz eost 1968. Dibabet e oa bet an deiz hag al lec'h-se en askont d'ar "Celtic Forum" a oa bet prientet eno evit ar Gelted yaouank a zeufe d'ar C'hendalc'h. Ne voe gwelet en gwirionez nemet ur skosad eus Bro-Saoz, hag izili ar Vreuriezh. Moarvat e oa bet embannet re ziwzehat an emvod-se. Oferenn vrezhonek en iliz-parrez, merenn er skol gristen ha bodadeg-veur da c'houde. Y.E.Ar C'horr a voe andanvet da rener, M.L.Talbot da sekretourez ha F.Ar Moal da deñzorer; Y.Talbot, distroet evit mat eus an Dahome a voe anvet da rener-a-enor, ha Y.E.EL'Héréec da ail-rener.

#### OFERENN TREGLANVIZ.

E-pad an diskar-amzer, e miz here a gav din (kollet em eus va ajenda ha n'hellan ket reiñ an deiz resis) hon eus lidet un oferenn vrezhonek e Treglanviz en enor d'an Ao.P.M. Lec'hvien (a oa bet person eno etre 1932 ha 1937, a-raok dont da Gemper-Gwezenneg) evit digeriñ 25-et bloavezh e varv. Kanet e oa bet an oferenn gant e niz, an Ao.Jozef Lec'hvien, rener-skol e Plejidi, ha deut da vezañ brudet nebeut goude pa voe dizoloet kuzhadelloù an F.L.B. An Ao. Kalvez, genidik eus Kemper-Gwezenneg, a brezeas diwar-benn person kozh e barrez, ken doujet eno ha gwechall. Sellet eo gant an dud evel ur sant hag ur merzher (1).

OFERENN SKINGOMZET EUS MANTALOD, HOLLSENT 1968.

Dorn hor boa roet ivez d'an Ao. Erwan-Andrev Ar Gall, person Mantalod ha Berc'hed da geñver an degouezh-se. An Ao. Tomaz a ganas an oferenn, an Ao. Kerrain a brezegas, hag an Ao. Kalvez a zisplegas al lidoù. Tud yaouank ar Vreuriezh a skoazellas tud ar barrez evit ar c'han. Ur muziker, ur manac'h eus abati Landevenneg, en doa lavaret e oa paour ar sonerezh da glevout war ar radio. Moarvat ne oa ket ken kaer ha hini laz-kanaf Montroulez, met fromus e oa klevout ur barrez a-bezh o kanañ un oferenn war-he-had e brezhoneg. Moarvat e oa tommoc'h d'galon an vrezhonegrien eget an oferenn "folklorel" - oferenn c'hallek gant kantikoù brezhonek - a oa bet skinet d'ar 1-añ a viz du 1969, eus iliz Plouyann gant ar pellwel.

DEVEZH-STUDI AR SUL 22 A VIZ KERZU 1968.

Aozet e oa bet an devezh-se evit prientiñ gweladennoù d'an eskibien vreizhat ha komz ganto diwar-benn kudem Vreizh. Diwezhatoc'h e vo aozet un niverenn ispisial gant divizoù an devezh-se hag e heuliadoù. Lavaromp diouzhtu koulskoude e oa bet lakaet da vont en-dro ur c'houlennadeg d'ar Pab hag ez eus bet graet ur weladenn da eskob Kemper gant ur strollad laiked. Ha neuze eo bet deut afer an F.L.B. da zihuniñ ha da galonekaat an holl. Disheñvel eo deut ar stourm da vezañ, ha setu perak eo ret ober ur gammad pe ziv war-raok, ha ne glaskomp ket gwelloc'h evel-just.

BODADEG-VEUR 1969.

Kamp-studi Bulad a oa bet klozet gant bodadeg-veur ar bloavezh, d'ar sul 7 a viz gwengolo 1969, goude kreisteiz. Divizet e oa bet e vefe aozet un dervezh retred e dibenn miz kerzu 1969 ha daou gamp e 1970: ur c'hamp-labour war-dro Pask hag ur c'hamp-studi e-kerz an hañv. Komzet e oa bet kalz ivez eus un niverenn ispisial eus M.S.E. a vefe savet gant an dud yaouank, niverus a-walc'h, o deus beajet e Kembre e-pad vakañsoù bras 1969. Un diviz e vefe en-dro d'un "daol grenn" dindan renerezh an Ao. Kerrain. Ne oa bet dibabet dezhiad resis ebet evit an "daol grenn"-se hag aon an eus na vefe ret c'hoazh d'an Ao. Kalvez tremen gant e enno-rennoù hag eñvo-rennoù ar re o devo kalon hag amzer da gemer o fluem. Setu alies buhez renerien ar c'helaouennoù !

An Ao. Erwan Troal, nevez distroet eus ar Perou, anvet da aluzener e Skol an Aod e Gwiseni, en doa asantet klask astenn levezon ar Vreuriezh war eskonti Kemper. Y.E. Ar C'horr a voe anvet da rener ha F. Ar Moal da denzorier; Y. Talbot a voe anvet da eil-rener ha Rivanon Kervella da sekretourez. Ar c'huzul-meur a c'houlennas digant an Ao. Kalvez adkemer, evit ur bloavezh c'hoazh, ar garg a aluzener.

Armañs Ar C'halvez.

1) gwel. Barr-Heol, niv. 13, kerzu 1957, ha levr H. Poisson.

KAMPOU 1968 ha 1969.

Pemp kamp a zo bet graet, kalz muioc'h eget n'hor boa soñjet ober en gwirionez. Met ar Vreuriezh n'eo ket kaset war-raok hepken gant renerien ha reolennoù, heñchet e vez ivez gant an degouezhoù hag an ezhommoù.

KAMP AR VOUSTER, PASK 1968.

Dalc'het e oa bet ur c'hamp er Vouster etre an 3 hag ar 7 a viz ebrel 1968. Labouret hor boa e chapel Santez Barba, bet savet er XVI-et kantved hag adkempennet da vat en XVIII-et kantved. Ne lavarin ket hiroc'h peogwir e vo lennet pelloc'h an danevell a zo bet kaset gant Gwenael ha Tudual Huon. (Mil trugarez dezho !)

KAMPIG AR VOUSTER, HANV 1968.

Pevar pe bemp ezel eus ar Vreuriezh a oa bet distroet ar gwener 13 hag ar sadorn 14 a viz gwengolo evit peurechuiñ al labourioù boulc'het e chapel Santez Barba. Chomet e oant bet ivez da dremen pardon Itron Varia ar Groaz Nevez er Vouster, a oa bet graet gant an Ao. Kalvez. Un devezh a bedenn hag a blijadur vras e oa bet evidomp-holl pemda-benn, nemet e oa bet distroet Yann Talbot klañv d'ar gêr. Abaoe o deus bet hini pe hini eus tud ar Vreuriezh tu da dremen dre ar Vouster ha da gaout an eurvad da vont da saludiñ an Aotrou Chaloni Lemmer, person ar barrez.

KAMP PLOUEG-PONTREV, PASK 1969.

E-pad tri devezh, eus al lun beure 31 a viz-meurzh 1969 d'ar merc'her 2 a viz ebrel 1969, hon eus peñactaet hag adlivet chapel an Iliz Kaer en Ploueg-Pontrev. Al lodenn gentañ eus ar chapel-mañ a zo eus ar XIV-et kantved hag al lodenn ziwezhañ eus an XVIII-et kantved (1730). Ar gamel, e-lec'h ma oa bet kroget an tan un daou pe dri bloaz'zo, a oa bet echuet e 1619.

Brudet eo ar chapel er parrezioù tro-war-dro en abeg da Sant Jorand, patron al loened korn, interes e-kichen ar c'heur. Sant Jorand a oa bet kanet en Gwanac'h (Gommenec'h) met savet e oa bet en Ploueg. Hervez lavarioù ar re gozh - hag ar c'hantik - en doa rentet bev d'e vamm he buoc'h bet lafet ha lazhet zoken gant ur bagad soudarded eus Brelidi! Mont a reas da vanac'h da abati Sant Juheg en Pederneg. War c'houlenn e genvroiz, a yeas e prosession d'e gerc'hat, e tistroas hag e savas ur peniti en Dreinded. Setu perak, moarvat, e vez graet ar pardon bras deiz Sul an Dreinded (1).

Lod eus ar baotred a oa bet lojet er presbitor ha lod all e tiez prevez er bourk. Holl avat e tebramp er presbitor, hag un degemer tomm a oa bet graet dimp gant an Ao. Sidaner, person ar barrez hag e c'hoar. Kanet e oa bet evel-just hag un nozvezh bennak e oamp bet chomet da welout war ar skinwel ar film "Divizoù ar C'harmeziadeged".

#### KAMP GURUNUHEL, PASK 1969.

Un eil kamp a oa bet aozet etre an 10 hag an 13 a viz ebrel 1969 e Gurunuhel. Hemañ a oa bet ur c'hamp discurt diouzh ar reoù all evit meur a abeg. Debrñ a rae ar baotred en ur c'harrdi ha lojañ er c'hriagnol a-us en ur vereuri. Rivanon Kervella hag Anne Bourdonneg a aoze ar p'edoù. Yen e veze er c'harrdi, tommañ avat a rae d'ar pennoù ha d'ar c'halonoù gant ar boued mat, ar c'hanaouennoù ha sistr c'hweck ar vro. E giz-se hor bga bet tro d'en em veskañ muioc'h gant tud ar g'riadenn a zûas ken laouen da reiñ dorn dimp. D'ar sadorn e oa deut unan eus lazioù B.B.C.CYMRU, a oa o sevel ur film e Breizh dindan renerezh hor mignon Rhys Lewis, da gemer un nebeut skeudenoù en Sant Fiakr. Ne adskrivin ket amañ ar pezh am eus danevellet dija war Barr-Heol (2). An deiz war-lerc'h e voe gwelet ur pemp kant bennak a dud da vihanañ o tont d'an ofereñn vrezhonek. Seurt kampoù ha seurt gouelioù a zo un drugar evit ar spered haf ar galon. Ar c'hamp a oa bet graet penn-da-benn diwar goust ar Vreuriezh, met ar gest hag ar profoù dastumet a roas peadra da baeañ an holl vizoù.

#### KAMP BULAD, GWENGOLO 1969.

Evit klozañ an hañv hon eus bet un tamm kamp-studi e ti leanezed Bulad, eus ar g'wener d'abardaez 5 a viz gwengolo d'ar sul 7 a viz gwengolo. Tomm e oa bet an degemer er skol ha predoù mat a oa bet servijet dimp evit ur priz izel, re izel zoken. Ur bern tud yaouank, dianav dimp a-gremm al lodenn vrasañ anezho, en o zouezh daou gembread katolik ha kembraeger, a oa deut da selaou prezegenn Yann Talbot diwar-benn deverioù ar gristenien en Breizh ha hini Yann-erwan Alan, eus Kintin, diwar-benn diaesterioù ar gristenien yaouank. D'ar sadorn, etre kreisteiz ha koan hor boa naetaet chapel ha bered Burtuled, en parrez Sant-Servez. Nevez 'oa e oa bet lakaet paper-goudroñs war an doenn da c'hortoz ma vo kavet arc'hant d'ober gwelloc'h ha nevez 'oa ivez oa bet laeret an holl statuoù koad. E-mesk ar riviñoù o doa kenofereñnet an Ao.Kalvez, Traol ha Kerrain dirak 400 pe 500 a dud, an hanter anezho paotred da vihanañ, fromet holl betek an daeloù. Darn o doa graet 20 ha 30 kilometrad evit dont d'an ofereñn, hag ur wech ouzhpenn brokus e oa bet an holl ken evit ar chapel, ken evit ar Vreuriezh.

#### Armañs Ar C'halvez.

1) G.Millour, Les Saint Guérisseurs et Protecteurs du Bétail, Lib.Celtique, 1946,p.77-81 - Perrot-Moal,BUE AR ZENT, 1912,p.398.

2) Barr-Heol,niv.60, p.69-77. Ur film kembraek e oa. Ha hervez ar pezh am boa klevet an hañv tremenet en Kembre, plijet en doa kalz da arvestourien B.B.C.CYMRU. Peder pe bemp abadenn a oa bet savet gantañ.

#### KAMP BREURIEZH SANT ERWAN ER VOUSTER.

Evel warlene, en deus kroget kamp B.S.E.da zeiz diwezhañ ar skol, d'ar merc'her da noz. Ar wech-mañ e oa er Vouster, ur vourc'h vihan e-kichen Karaez.

Ur wech erru er g'riadennig hon eus ranket gouenn e pelec'h e oa ar presbital ma vimp lojet ennañ e-pad pevar devezh. Un hent bihan a oa evit mont betek eno, ur porzh dirak an ti, ur puñs. Ul lec'h plijus ha didrouz, gwez ha parkeier en-dro dezhañ. Degemeret e voemp gant ar garab-senn, ar person ("person kozh ar Vouster evel ma lavare eñ e-unan) ne oa ket er g'êr. Poan hon eus bet en deroù evit kompren ar vaouez met a-benn nebeut amzer e duiemp ne oa nemet pevar gwele evit dek bennak a dud. Neuze ec'h erruas ar person war e varc'h-houarn dre dan, dont a rae eus ar chapel ez aemp da gempenn an deiz war-lerc'h."Ni holl en em stardo", ha diouzhtu e krogjomp d'ober distruj gant sikour ar person. Ar matarasennoù zo taolet war al leur, lod a gousko warno, lod all war ar golo'hedoù.

War-dro seizh eur hanter ez omp aet ouzh taol; servijet zo bet deomp scubenn domm ha dispar evel ma vez graet war ar meez ha n'eo ket "bouillon cube" dourek. Evel-just hon eus debret kig sall hag evet sistr an Ao.Person. Ha plijus eo bet an nozvezh gantañ, holl asamblez dirak an tanted o tañsal er siminal. Diouzhtu e voemp mignoned joaus, evel pa vijemp bet anavezet an eil gant egile a-viskoazh, holl laouen da vezañ echuet gant ar skol, laouen o soñjal el labour a grogfemp gantañ a-benn warc'hoazh. Met, er gweleoù, an nozvezh kroget ken mat ne oa ket echu, pell ac'hane: an hini oa war ar gwele zo 'n em gavet war al leur, ar rener, "an hini blev ruz" - spi am eus ne vo ket feuket pa glevo e lésamv - en deus ranket dont da lakaat urzh. A-benn ar fin he oa mui nemet trouz an du o tiro-c'hal, ur c'hazh o ouelañ hag al lodod o redek.

Abred diouzh ar beure e oamp bet dihunet gant cholori ar re g'oshañ o tiskenn an diri evit troc'hañ o barv. War-dro eizh eur e oamp bet galvet da evañ ar c'hafe. Ar pred a oa plijus hag evel-just un tammig trouzus. Alies e veze klevet mouezhioù kreñv ar renerien, Erwan ar C'horr ha Yann Talbot. Da nav eur, dindan urzhioù Fañch, "paotr ar redom", ez aemp d'al labour. Pemp pe c'hweck a yae war droad gant ar skoulioù hag ur garrigell. Ar re all, ar re gozh hag al lorganed a yae gant kirri. Ar chapelig a oa tost a-walc'h d'ar presbital. Evit erruout e oa ret mont gant un hent-karr, toulllet ha didoulllet gant an amzer ha kollet e-kreiz ar parkeier. E-kichen ar chapel e oa tiez kozh, kaer-tre. Ar chapel, Santez Barba hec'h anv, a oa kluchet war un dor-genn. En traoñ ur sterig a gane e-kreiz ar bleunioù. Ur

pont a drouze anezhi. Eno ez aemp da gerc'hat dour evit ar simant.

Kalz a labour a oa d'ober; gant kement a dud avat ne badas ket pell. Da gentañ e voe ret tennañ kuit ar plastr kozh mesket gant pri ha plouz diwar ar mogerioù. Roet e voe dimp bep a vorzhol hag un tavañjer, hag a-benn kreisteiz eant no azh Goude merenn hon eus tennet lamot pri ar juntuù. Ne oa ket tomm an amzer: an devezhioù war-lerc'h hon eus kavet skorn zoken er sailhoù dour. Echu gant al labour kentañ hon eus kroget da lakaat simant etre ar juntuù. Buan a-walc'h eo bet kaset al labour da benn peogwir ar sadorn da noz ne chome ken nemet un nebeut disterachoù d'ober.

Evit ar sul hon eus en emwalc'het, lod evit ar wech kentañ sur abaoe tri deiz ! ha bet hon eus un oferenn, oferenn sul ar bleunioù pe ar beuz, e brezhoneg.

Tud 'zo a c'hellfe evel-just ober kalz a rebechoù d'hol labour, dreist-holl tud a vicher. Met den gwelloc'h egedomp ne c'hell gouzout ar pezh a zegas deomp ul labour dedennus, dreist-holl deomp-ni tud kêr: dougen mein ponner, labourat gant simant ha kaout daouarn debret gantañ, kaledennoù ha klogorennoù warno. Den kennebeut ne c'hell gwelloc'h egedomp-ni gouzout ar vad en deus graet deomp bezañ gant mignoned e-pad pevar devezh o'n em glevout etrezomp, o labourat, o tebriñ, o komz, o kanañ.

Ur c'hamp a vignoniezh hag a labour eo bet war-un-dro, ha laouen e vezimp o tistreiñ ar bloaz a zeu. (1)

Gwenael ha Tudual Huon, eus Brest.

1) Deuet e oant o-daouik da Bluc'g, ha spi am eus e vo tu d'embann o danevell kentañ tro.

oooooooooooooooo

NEVEZINTIOU

Hor gwellañ gourc'hemennoù a ginnigomp holl

da M.L.Talbot da gefverhe dimeziñ gant Feliz Bello e 1968, ha da gefver ganedigezh o merc'hig Annaig e 1969;

da Fañch Ar Moal ha da Anne Bourdonnec, da gefver o cured a oa bet lidet e Sant-Servez, ar sadorn 16 a viz eost 1969.

Ra vo benniget o ziegezhioù gant Sant Erwan hag holl sent ar vro !

-----  
Renner-marc'had-mouler : Armand LE CALVEZ, Crec'h-Avel, LANNUON.  
Direct. gerant-imprim :

Dépot légal : 3-e trimestre 1969.  
Diskleriet hervez lezenn :

N° C.P.P. 35 323.

- 10 -

DIELLOU  
Documents

S K O L, niv, 40-bis.

DECLARATION DE L'ARCHEVEQUE ANGLICAN DU PAYS DE GALLES,  
prononcée à l'assemblée générale de son Eglise le 25/9/68.

"Le Pays de Galles n'est pas une province, mais une nation et une nation privée de ses propres institutions politiques, pendant que le gouvernement de plus en plus centralisé devient incapable de résoudre ses problèmes... Dans la conjoncture actuelle, il n'est pas possible d'ignorer le problème de la langue. L'histoire a fait du Pays de Galles une région bilingue et les deux parties doivent faire preuve de compréhension pour éviter le pire. Le danger existe de créer une situation semblable à celle de la Belgique ou même un "apartheid" basé non sur la race mais sur la langue. Ceux qui parlent le gallois devraient montrer plus de compréhension qu'ils ne le font parfois à cause de la grande sympathie qu'éprouvent pour la langue ceux qui ne la parlent pas et du sentiment de frustration dont ils souffrent. A cause de notre situation historique nous ne pouvons pas accepter de considérer ceux qui ne parlent pas gallois comme des citoyens de seconde zone ou des gens qui aiment moins leur pays que leurs compatriotes bilingues.

Il est d'autant plus inacceptable de considérer ceux qui parlent ou pensent en gallois comme des gens bizarres ou de s'attendre à ce qu'ils rédigent des actes administratifs ou officiels dans une langue peu familière. Le gouvernement a adopté une politique plus raisonnable mais il ne l'applique pas assez vite... Pour éviter une scission linguistique, il est nécessaire d'instaurer une politique vraiment bilingue en reconnaissant aux deux langues à tous les niveaux les mêmes droits quant au respect et à l'usage. C'est une grosse erreur de croire que la disparition du gallois se fera à brève échéance. L'influence des écoles galloises et la génération nouvelle prouvent que tous les préparatifs qui avaient été faits pour son enterrement dans certains endroits devront être mis à la réserve.

Beaucoup de gens pensent que c'est dommage et parmi eux, à notre grande surprise, se trouvent des gallois galloisants. Les anglais font preuve souvent de plus de sympathie. Pourquoi s'occuper de la langue ? disent-ils. Puisque les Gallois anglophones ne subissent aucun désavantage, la disparition complète de la langue serait peut-être un avantage pour le Pays de Galles...

Que devons-nous penser de ces affirmations en tant que membres de l'Eglise Anglicane ? Quelle réponse devons-nous donner ? Nous répondrons que la langue est essentiellement quelque chose de spirituel qui a des liens avec l'âme d'une nation. Avec la disparition d'une langue s'appauvrit la culture et la religion d'une nation, de même que l'humanité dont elle fait partie.

- 11 -

Le fait que l'Eglise Anglicane au Pays de Galles n'est pas assez sensibilisée à ces problèmes essentiellement spirituel explique, dans une certaine mesure, sa faiblesse dans les régions galloisantes.

Il nous faut considérer la situation dans laquelle nous nous trouvons et devenir une Eglise vraiment bilingue. Cela ne veut pas dire que nous devons tous apprendre le Gallois et qu'il n'y a plus de place dans l'Eglise au Pays de Galles pour les monogottes gallois ou anglais. Cela ne signifie pas que les Anglais qui viennent faire du ministère parmi nous ne sont pas les bienvenus. Ce serait s'écarter de la vérité parce que nous sommes une petite nation et une petite région, aussi les relations établies par-dessus les frontières sont-elles indispensables à tous. Mais il faut que ceux qui désirent faire du ministère dans ce coin du monde soient prêts à comprendre notre position et notre patrimoine.

C'est une raison également pour l'Eglise d'appuyer un système d'enseignement bilingue intelligent, basé sur des principes solides et la compréhension du bien réel des enfants de nos écoles.

Voilà la raison pour laquelle nous avons besoin d'une liturgie bilingue. Je crois que c'est dommage que notre tendance à l'apartheid liturgique ait été accentuée par le fait que les livres liturgiques soient édités dans l'une ou l'autre langue. Tous nos livres, et en premier lieu notre nouveau "Prayer Book", devraient être bilingues (1) ...

Que ceux qui ne parlent qu'anglais aient de la considération pour les droits et les revendications de la minorité galloisante; que ceux qui ne parlent que le gallois, qui ont opté pour lui, se rappellent que la majorité a aussi des droits et des revendications dignes de respect. Que les uns et les autres fassent preuve d'amour; qu'ils se rappellent que tout, y compris la langue, vient de Dieu, et en Lui il n'y a pas de violence, comme l'a dit un Père de l'Eglise. (2) "

- 1) Le "Prayer Book" des fidèles est effectivement bilingue.
- 2) Texte paru dans "Y Faner" du 3/10/68 et traduit par SKOL.

#### EXTRAIT D'UNE CONFERENCE FAITE PAR L'EVEQUE DE BANGOR à la cathédrale de Llandaff-Cardiff.

"On prétend que les jeunes de "Plaid Cymru" (Parti Gallois) ferment les yeux sur les réalités de la citoyenneté mondiale en se consacrant à un particularisme dépassé. Mais ces jeunes qui réclament la représentation directe du Pays de Galles au sein des organismes internationaux appartiennent à une nouvelle génération qui a davantage le

sens des responsabilités internationales que celle qui l'a précédée. Nous les gens d'Eglise, nous sommes tout à fait satisfaits de l'ordre établi et nous ne nous préoccupons pas suffisamment des affaires internationales. Est-ce nous, ou les jeunes, qui sommes les particularistes ? Si de nombreux étudiants gallois désirent, au lieu de céder à des tendances anarchisantes, reconstruire le Pays de Galles et accorder plus de considération à l'homme qu'à l'argent, je ne vois pas pour quelles raisons nous pouvons nous opposer à leurs revendications ?... La seule chose qui puisse nous unir, c'est l'amour de notre pays, le désir d'oublier les avantages personnels quand le service de notre peuple l'exige (1)".

- 1) Texte paru dans "Y Faner" du 24/10/68 et traduit par SKOL.

#### DECLARATION DU CONSEIL DES INDEPENDANTS.

"Aujourd'hui, il existe des signes évidents que le peuple gallois a pris conscience d'une façon profonde et plus étendue des futurs intérêts du pays. La presse galloise et anglaise, la radio et la télévision ont reconnu qu'il n'est plus possible de parler de politique au Pays de Galles d'aujourd'hui sans tenir compte de cette évolution.

Ce n'est pas seulement une brise légère mais un vent violent qui souffle dans la direction de l'autonomie. On ne saurait se contenter de mesures de décentralisation gouvernementale ou d'améliorations sporadiques de la situation économique. Cela ne suffirait pas à satisfaire les revendications du peuple gallois concernant la reconnaissance de son caractère national et la création d'une administration soucieuse de la vie et de la dignité du pays...

Ce n'est pas un nationalisme étroit qui inspire ceux qui luttent pour la reconnaissance de ces droits, mais la persuasion que l'autonomie satisfera le mieux les besoins du pays, assurera le mieux son existence, lui rendra confiance dans son avenir, permettra au peuple de garder et de développer son héritage national et sa culture celtique, et en même temps de contribuer plus généreusement à la culture des autres peuples de l'Europe et du Monde.

Ce n'est pas aux Eglises ni au Conseil des Eglises qu'il appartient de définir la forme d'autonomie qui servirait le mieux les intérêts du Pays de Galles, mais aux politiciens et aux électeurs. Malgré cela, nous demandons à nos frères chrétiens de travailler et d'agir en faveur du principe de l'autonomie et de n'utiliser que des moyens non violents (2) "

- 1) Texte paru dans "Y Faner" du 3/10/68 et traduit par SKOL.  
(Sur la situation des différentes églises chrétiennes au Pays de Galles lire le chap. XIV de "LE PAYS DE GALLES".)



Voilà des déclarations que signeraient

JEAN XXIII : "Nous devons déclarer de la façon la plus explicite que toute politique tendant à contrarier la vitalité et l'expansion des minorités constitue une faute grave contre la justice, plus grave encore quand ces manoeuvres visent à les faire disparaître.

Par contre, rien de plus conforme à la justice que l'action menée par les pouvoirs publics pour améliorer les conditions de vie des minorités ethniques, notamment en ce qui concerne leur langue, leur culture, leurs coutumes, leurs ressources et leurs entreprises."

Pacem in Terris, N° 95-96.

PAUL VI : "Riche ou pauvre, chaque pays possède une civilisation reçue des ancêtres: institutions exigées pour la vie terrestre et manifestations supérieures - artistiques, intellectuelles et religieuses - de la vie de l'esprit. Lorsque celles-ci possèdent de vraies valeurs humaines, il y aurait grave erreur à les sacrifier à celles-là. Un peuple qui y consentirait perdrait par là le meilleur de lui-même, il sacrifierait, pour vivre, ses raisons de vivre. L'enseignement du Christ vaut aussi pour les peuples: "Que servirait à l'homme de gagner l'univers, s'il vient à perdre son âme ?".

Populorum Progressio, N°40.

LES EVEQUES DU CANADA (!) : "L'une des caractéristiques du XX-e siècle réside dans le fait que l'aspiration à la justice n'est plus seulement l'apanage des personnes mais aussi des peuples, des régions et des communautés ethniques..."

Docum. Cathol. 1967, col. 925-936.

Les Bretons préoccupés de l'avenir de leur peuple et de sa culture sont en droit d'attendre de leurs Evêques une déclaration susceptible d'éclairer leurs compatriotes sur la justice de leur cause. Se taire c'est actuellement se rendre complice du génocide perpétré de longue date en Bretagne par l'Etat français. A nos yeux, ce silence frise le scandale.

BREURIEZH SANT ERWAN, Association de jeunes catholiques.

"Il vaut décidément mieux pour l'Eglise risquer une parole difficile, parce qu'elle engage dans l'actualité, que de se cantonner dans un silence confortable et complice."

Georges CASSALIS, "Luther et l'Eglise Confessante",  
Édit. du Seuil, 1962, p. 126.

Direct.-Gérant-Imprim.: A. Le Calvez, Crec'h-Avel, LANNION, 22  
Dépôt légal : 4-e trim. 1969 - - - N° C.P.P.P. 35 323.

